

(368, suite)

Chanson.

D'eur femelen ouy demezet,
 Mari Jourdren ez eo hanvet; (bis)
 E za bemde d'an taverniou
 Da barfoultra he bourzellou.
 Me o lez da gonsideri
 Peg'er bras ez eo demerji.

Me chomas clàn var va quele,
 Hep gallout trei e nep coste, (bis)
 Hag hi o gemer ar c'holic'hat,
 Di'h e c'has ganti d'ar marc'hat. Me o lez...

(369)

Ur gos linsel a voa ivez,
 A c'has ganti er memes dez. (bis)
 Caer am boa crial, ober trous,
 Va reor a chomas var ar plous. Me o lez...

Ur gos vallin a voa manet,
 Etre voa mat na ne voa get; (bis)
 Mont a ras ar vallin ganti,
 Tri chopinad e doe eviti. Me o lez...

Mes ar maro zo diremed,
 Deus va fumelen anlevet; (bis)
 En eur eva eur borsion
 Ezeo bet rannet e c'halon. Me o lez...

(370)

Setu maro va fumelen
 Hag entervet er variqen; (bis)
 Aon ameus na resusito,
 Lipat rafe an dufennou. Me o lez...

Cunduet eo bet d'ar vèret,
 Gant cals a joa hag a respet, (bis)
 Nonpas gant bêteyen he bro,
 Mes gant sonerien Plourio. Me o lez...

(Vol. I, p. 368-370).